

**BREURIEZ AN INTRON SANTES-ANNA-AR-PALUD,**

**POSTET**

EN E CHAPEL, VAR BARRES PLONÉVEZ-PORZAY,  
d'ar bemzecvet devez a viz even mil eiz cant unan a daouguent,

**CANT AN AUTROU ESCOP A GUIMPER, DRE URZ AR PAB**

**GREGOR XVI.**

*Cest enya a ran em beuz recevet huna a vis*

18 *evit quenveur, quenc'hoar euz breuriez an intron  
Santes Anna*

*ac em euz skrivet e hano ell Lear zo preparat ama,  
evit ma allo profita eus an oll induljançou ar breuriez ma.*

*E chapel Santes Anna ar Palud, dar devez a vis*

18

**OKÆSON DEVOT D'A SANTES-ANNA A D'A VERC'HES-VARI.**

Me ho salud Mari, leun à c'hraç, an autrou Doue zo ganoc'h,  
ho chraç ra vezo ganign, beniguet oc'h dreist an oll groaguez,  
ha beniguet ra vezo Santes-Anna, ho mam, eus à behini, ô  
Guerc'hes Vari, ezoc'h ganet, hep taich, hac hep pec'het, à c'hui  
oc'heus laqueet er bed Jésus-Christ, guir vab Doue, ha Doue e  
unan, pehini a vev hac a ren epad an eternite. Evelze bezet  
great.

*Ar Pab Pius VII en deus accordet cant devez induljanç evit lava-  
ret devotamant ar beden-mâ, en henor dan intron Varia a dan intron  
Santes-Anna, hac un induljanç plenier d'ar c'huec'h-var-n'uguent a  
vis gouere, dar re pere goude bea en lavaret dan neubeuta dec guea-  
ch ar miz, a goessui hac a gommunio neuz forç epeleac'h.*

**INDULJANÇOÙ PLENIER PERE A ELL PEB CHRISTEN GONIT  
E CHAPEL SANTES-ANNA-AR-PALUD, E PARRES  
PLONEVEZ-PORZAY.**

Induljanç plenier : 1<sup>o</sup> D'ar c'huec'h-var-n'uguent a vis gouere; 2<sup>o</sup> D'ar  
zul quenta a viz eaut; 3<sup>o</sup> D'ar zadorn aroc ar pardon bras; 4<sup>o</sup> Da zeiz ar  
pardon bras, pehini a zo ato d'ar zul divea a vis eaut; 5<sup>o</sup> Induljanç plenier  
ivez, pehini a eller gonit evit an anaon, d'ar meurz var lerc'h ar pardon

bras, n'euz forç e pe viz e tigouezo. Evit gonit peb hini euz ar pemp induljanç plenier-ma, eo red coëz, communia, a pidi en eur visita chapel Santes-Anna: Ar goëssion ac ar communion a eller da ober neuz forç peleac'h; bizit ar chapel a renç beza gread da zeiz ar communion, ac aroc euz-heaul. 6° Induljanç plenier c'hoas, pehini a eller ivez gonit evit an anaon, ur veach bep miz neuz forç pesseurt sunvez. Evit gonit an induljanç divea-ma eo red ivez coëz, communia, pedi eun tachadic, bisita chapel Santes-Anna-ar-Palud da veurz, e non pas un devez all, ac ospen lavaret, er chapel, ar gredo teir gueach pen da ben, en honor dan Drindet Adorabl.

**INDULJANÇOU ALL PERE A ELL PEB CHRISTEN GONIT ER MEMEZ CHAPEL EPAD MIS EAUST.**

Induljanç a dric'hant devez: Dan deiz quenta, a dan deiz diveza a vis eaust; bep sul a bep meurz epad miz eaust, a da zeis goël Maria-Anter-Eaust. Evit gonit an induljançou-ma eo red dan nebeuta caouët ur guir gontrition, pidi gand devotion en eur visita ar chapel.

**INDULJANÇOU BREURIEZ AN INTRON-SANTES-ANNA-AR-PALUD.**

**INDULJANÇOU PLENIER.**

1° Induljanç plenier en devez ma veer recevet er Breuriez: 2° Memes induljanç plenier d'a zeiz gouël ar Vreuriez, pehini a zo beb bloaz e chapel Santes-Anna-ar-Palud, dar zul a roc ar Pantecost: Evit gonit peb hini eus an diou induljanç plenier-ma, eo red coëz, communia, a pidi gand devotion ur momedic en eur visita chapel Santes-Anna. 3° Un induljanç plenier c'hoas en articl ar maro, gad ma vior glac'haret, a ma vo sonjet er galon en hano a Jésus, ma na eller qued er prononç a c'hinou: 4° Peb oferen lared neuz forç ous pe auter e chapel Santes-Anna-ar-Palud a c'honiz un induljanç plenier evit ar breur pe ar e hoar maro e intention pehini eo lavared.

**INDULJANÇOU ALL.**

Gonit a eller seiz bloavez a seiz guech daou ugent devez a induljanç: 1° Dan eil zul ar c'hoariz; 2° dar meurz fasq; 3° dan eil zul eus eizvete ar Sacramant; 4° A dan drede sul euz an azvent. Evit o gonis e renquer dan nebeuta bea mantret a galon, pidi ur mareadic en eur visita chapel Santes-Anna.

Erfin evit peb œuvr a drugare, ma veer e guirione gla-c'haret, a eller gonit, neuz forç e peleac'h, aliez memes e peb devez, un induljanç a driu-quent devez.

Oll induljançou breuriez Santes-Anna-ar-Palud a eller da applica dar re varo.

**Dever peb breur a peb c'hoar eo 1° Condui ur vuez christen a devot; 2° Medita aliez buez Santes-Anna; 3° Imita e vertu-siou. — Neuz peden oblij ebet; mœz mad eo lared an oraïson devot a zo merquet var ar billet-ma.**

*An oll induljançou merqued var ar paper-ma, a zo roëd evit ato, ac accordet gand ar Pab Gregor XVI a Pius IX: Ar scridou deud domp eus a Rom evit an oll induljançou raportet ama, zo bet amprouët gand an autrou Escop a Guemper, a siellet evel ma eo dlead. O c'honservi a reer e parres Plonevez-Porzay.*